

RECIT

COMPOSET A NEVE

VAR UN TOL VAILLANTIS

ERRUET A DOST DA BARIS

AN 3 A VIS MEURS DREMENET

Var eun ton neve.

Me ho ped, assistantet, da glevet recitan
 (Ma-unan hon estonet dimeus a guement-man)
 Ar pez a so arruet var ar c'hopi gallec,
 Mar gallan gout ar feçon d'ho zrei en brezonec.

Mes, qent avanç davantach, e c'houllan sclerigen
 Digant ar Speret-Santel, da riman pen-da-ben
 Qement gir a so scrivet var ar c'hopi gallec,
 Ha d'ho esplican facil d'an oll en brezonec.

Ur vreg yaouanc magueres, o tistrei a Baris,
 Bet e qerc'hat ur buguel eus a dy ur bourc'his
 Da gass ganti da vagan en toes he bugale,
 Evit sicour o zevel ha gonit bara dé.

Dre ur c'hoat e renc tremen o vont da gaout ar guer
 Hac eo bed attaqet, siouas! gant ur voler,
 Hac en guisqet en belec, o tont d'e bonjouri :
 Ar goad en e goaziet a deu da remui.

* Bonjour, eme an den-man : erru oc'h, ma greg vad.
 — Ha dec'h-n pareillamant, emei, autrou'n abbat!

tirage non signalé en Ollivier

**Souet hon ous o goelet aman o pazeal,
Rac ar c'hood-man so brudet da vean un doul fall.**

— Doue, eme al laer-man, a breserv pep-hini :
Me so aman o vale da n'eum disenoi,
**Hac e meus ma flijadur, o c'hortos overnia ;
Da laret ma breuvial na deu den d'am zroubla.** »

O qerzet en he c'hever, en deus interrojet
Da c'hout a belec'h e teue ha pelec'h e oa bet,
O voelet e oa ganti var e brec'h ur buguel,
Hac en guisqet ar c'haeran, casi evel un æll.

Goude en deus goulennet outhi incontinent
Ha ne devoa bet netra evit avançamant,
O qemeret ar buguel da zicour e soigni,
Da denna ar virione, mar galje, diganti.

« Eus, emei, autrou'n abbat, arc'hant em eus touchet :
Cant leur em eus recevet evit e guemeret,
Nemert ma meus ar greden e collin ma bue,
Qent mont emes ar c'hood-man, an innoçant ha me.

— Na sonjet qet gement-se, emean, ma greg vad ;
Me a vo dec'h compagnon da vont er mes ar c'hood :
E zoc'h gant ar c'habiten, n'ho pezo droug ebet,
Nemert ma renqet rentan ar pez o c'heus touchet. »

A zidan e soutanen e tennas ur zabren
Hac e savas anezi ractal a us d'he fenn,
Hac e c'houennas ganti ar yalc'h pe ar vue,
Ha laret dean pelec'h e deus lacqet ane.

« Plasset e meus aneze en dro d'an innoçant ;
Goel e ganen ma bue evit aour nac arc'hant.
Caët a ret aneze o tont d'e zispaca ,
Ha lest ma bue ganen hac e-hini gantan. »

Cregui a ra er buguel en ur meneus instant,
 Evit tont d'e zispacan da guemer an arc'hant :
 Dre bermision Doue e tappas ar zabren,
 Ha gant un tol, dre vonheur, en deus rannet e benn.

Hep m'en deus bet ap amzer da guemer an arc'hant,
 E ranqas mervel eno er plac, subitamant,
 Hac ar vreg hac ar buguel dre viracl so rentet
 Voar an hent bras pareabl, ep m'ho deus droug ebet.

Tri gendarm a erruas hac o deus goulennet,
 O velet ar goad outhi, petra oa erruet,
 Hac e deveus ispliqet diraze pen-da-ben
 En devoa lazet ar mestr dimeus ar volerien.

Dont a reet ganemp-ni, emeze, var ho qis,
 Evit ma elfomp goelet ar mercq ho vaillantis.
 Pa oue souillet an den-man, eo e armo cavet,
 Diou bistolen a daou den, ur zabren, ur siflet.

P'ho devoa gret ho ingal hac ho proces-verbal,
 Unan demeus ar gendarm a c'hoez enni ractal,
 Hac en em rentas pevar deus e gamarado
 Da velet ho c'habitent var an douar maro.

Pa veljont an habijo e fellas d'e tec'het;
 En um renta a ranqont pe deuan da vernel,
 Ha lezel ho garotti hac o c'has dar prison :
 En Paris e recevont ho c'hondaonation.

Hac ar vreg hac ar vuguel so conduit dar guer,
 He vaillantis so brudet ebars en peb qarter.
 An hini en deus invantet distrei ar ganouen
 A chom en parros Pleuyel; e hano YAN AR GUEN.